


8N1-3-047

- 4 -

8

Pedit, pedit aketuz, guerc'hez trugarezuz,
Ma vez oll vretouned stagoc'h stag da Jesus,
Pedit Itron, hor fsians, ma c'hellimp guelet'hoaz
Broc'halloc'h ober enord'hor Salver ha d'he Groaz.



Montroulez, imp. Lanoë

CANTIG

ITRON VARIA PONT-MEEN

DISKAN

Enn hent, enn hent gant joa, bugale Breiz-Izel
Ar guella d'eus ar mammou a zo eus ho kervel,
He divrec'h hag he c'haloun evidomp zo digor
Enn hent, potret armenez! enn hent tudann arvor!

1

Kristenien a feiz bero, kerzit a vagadou
Merc'hed, goazéd, beleien da veuli burzudou
Diskleriet gant ar Verc'hez, patronuez Breiz-Izel
E keriadik Pont-Meen, d'an amzer ar brezel

2

Tost eo d'ann enebourien kas heteg en hor bro,
 Ann tanguall hagann daelou ar spounthag ar maro
 Hogen ann Itron Vari mamm vinniget Jesus
 Oc'h glac'har he Bretonet, a zellaz truezuz.

3

Eun deiz, d'an abardaez hi en em ziskouezaz,
 Da vugaligou dibec'h e lein ann envou glaz ;
 Skeduz tro-var-dro d'ezhi stered a lugerne,
 Hag he daoulagad santel var-n-omp a ziskenne ;

4

Var ben ar vamm zirebech ez euz eur gurunen,
 Dindan he zreid en ear n'em zispack eur seizen,
 He sae ledan, hep gouriz, zo liou ar Baradoz
 Hage kreiz poull he c'haloun ema'r groas avenpoz.

5

Ar bobl dastumet eno, o klevet kement all
 A apavezaz buan ar Verc'hez didamall,
 Holl neuzevar ho daou-lin e kouezhontgantdaelou
 Hag eur beden virvidick a bignaz d'ann envou.

6

Sell ! a gri ar vugale, setu lizerennou
 O tiouan var ar seizen, lemm evel elvennou,
 Hag hi lenn a neubeudou dindan treid ar Verc'hez
 « Hogen, pedit, bugale, va Mab en d'ho truez. »

7

Raktal ann Enebourien, heb peur-ober ho zro.
 Gant ho c'hanoliou spountuz a dec'haz dioc'h ar vro
 Saveteet Breiz-Izel dre gras he batrounez
 Mari, bezit da viken hor mam hor Rouanez !